



201425

BM
QUIMPER

GUERZ NEVEZ

*Var sujet ar maleuriou euzus arruet dre an glao-
eyer horrubl cuezet e p'varzec departamant eus ar
c'hreiz-deiz a Franç, ar 27, 28, 29, 30 ha 31 eus a
vis Here, 1 ha 2 eus a vis Dù 1840, hac en deveus
distrujet nombr kærïou ha bourgiou, millierou tyez,
beuzet un niver bras a dud, ha goloet p'varzec léo
douar tro var dro gant an doureyer spouronus.*

Var ton : *Guerc'hes Glorius Vari.*

N'EUS qet pell-amzer em boa, an ecres em c'halon,
Roet da Vreizis-Izel ur güir Relation
Deüs an diluch spouronus en deveus distrujet
Nombr a guæriou ha bourgou, tud hac a anevalet.

Mes hirio, va c'henvrois a c'houlen en rimou
Ar memes Relation demeus ar maleuriou :
Allas ! neo qet eur matier evit beza canet ;
N'eus fors..... anavezet eo calon ar Vretonet.

Done, Crouer an ênvou, Majeste adorabl,
Deurvezit, me ho suppli, dont d'am renta capapi
Evit ellout explica darn eus ar maleuriou
Erruet vardro Lyon ha calz all a vroyou.

Eur glao eus ar spontussa, er fin a vis Here;

Zo cuezet vel un diluch; an oll a spourone :
 Seiz devez ha seiz nosvez e zeo cuezet qer c'hoec
 Evel ma elfe beza'n amzer muia glaoec.

Qerqent ar Rhon hac ar Son, diou rivier vras meurbet,
 A deuas da huellat, da veza debordet :
 Ar ruyôu hac an hentchou chenchet en rivierou ;
 A zistruje tro-vardro... ô pebes maleuriou !!!

An diou rivier o veza neuze ta debordet,
 Ne vezas nemet ur môr spouronus da velet :
Pêvarzec departamant dindan an doureyer !!!...
 O Doue ! pebes maleur ! peguen terrubl mizer !

Na ellet douguen sicour nemet gant ar vagou,
 Rac an dud a voa pignet var lein an dôennou.
 Ar c'hri fors, an disesper a voa dre oll eno ;
 O clasq donet da dec'hel, e cavet ar maro.

An tocsin spontus a son, hac ar pavillon dâ
 A velet voa arboret en touriou a bep tu,
 Evit rei d'anavezout peseurt calamite
 A vrêve goalen Doue eno e peb contre.

Mes neo qet Lyon hepquen e deveus bet souffret :
 Pêvarzec departamant zo cazi oll beuzet.
 Sôn-ha-Loar, Cot-d'Or, Iser, Ain, Drom, Doubs ;
 Guenou'r-Rhon,
 Jura, Gard, Vauclus, Ardech, Var, Herault ha Haut-Son.

En eur villagen hepquen ec'h assurer eus bet
 Vardro ur pêvar c'hant den gant an douriou beuzet :
 Un daou-uguent mil samill, rentet en disesper,
 A zo bremâ reduiset d'an terrupla mizer.

E Montmerl e zeus daou c'hant seiz ha tri-uguent ty
 Discaret ; e Coromanch ne zeus chommet hini ;
 Frans ha Messini a zo ive distrujet oll ;
 Pontdevaux gant an dour bras zo cazi êt da goll.

E Maunial euz discaret pemzec ty gant an dour,
 F. Feillans pêvar-uguent, hep gallout rei sicour;
 Ebars ur villagen all na chom nemet un ty,
 Er Jone, tri hac anter-cant, ô maleuriou gou' gri!

Daou pe dri dy ha trêgont cuezet e Sant-C'lemant;
 E qever bourg Sant-Roman euz cuezet tost da gant;
 E Drac-ar-Panoux ouspen daou-c'hant zo discaret,
 E Bevil cant-anter-cant a zo ive cuezet.

E Sablon pêvar-uguent. Anfin, na eller qet
 Niveri an oll distruch a zo bet arruet.
 Qement en em rancontre var hent an doureyer
 A voa diouc'h-tu ranverset dre oll en o antier.

Pempzec-cant den zo eno, hep bara na repu;
 E clasq n'em savetai e qerzent a bep tu.
 Er güez, var an ddenou e pignent egaret,
 Qen a deuet gant bagou evit o c'hemeret.

Ur vreg maleürus spontet, gant an dour qemeret,
 Gant ar spouron e deveus bet e speret collet;
 Hac eur soudard poursuet dre'r memes elemant,
 Zo deut evel arrajet neuze en un instant.

Redec ra evel ur foll da glasq caout ur refuch
 Aroc an doureyer bras a güez vel un diluch;
 Mes inutil eo dezàn, an dorjou serret
 Er priv demeus a repu, ne voar pelec'h monet.

Anfin, anfonç ra un nôr, hac ec'h antren en ty;
 Ur vreg paour a voa eno daoulinet o pedi:
 Sailla ras gant counnar vras, hac e deus-bi lazet,
 Ha ne voe nemet gant poan e voe bet qemeret.

An deiz varlerc'h, er prison, e voe oll sebezet;
 Pa voe lavaret dezàn ar c'hrim en devoa grêt
 E commanças da grial, treantet e galon:
 Nan! nan! ze ne deo qet güir; me zo den asêçon.

Ha possubl ve, va Doue! em bez-me coumelet,
 Me, den honest a viscoas, un hevelep toiset!...
 Eu effet, assuret voet voe en e regimant
 Coulz hac en e vro bepret un den fur ha prudent.

E mis gouere diveza, e fonç rivier ar Rhon,
 Voe guelet ur men var bini e lennet gant eston :
 « Nep en devez va güelet, en deus scuillet daëlou,
 « Ha nep em güelo un deiz daëlou c'hoas a scuillo. »

Nombri an oll maleuriou, allas! na ellot get ;
 Dac'hann eus a bell-amzer ne vo get o gouezet ;
 Mes, ô Doue! peguen douç eo da galonou christen
 Clêvet comiz eus a actou meulabl evit peb den !

Ar Roue, ar Rouanes, an Duc a Orleans,
 Ar Brinces Adelaïd, c'hoar d'ar Roue a Franç,
 Bepret carguet a druez, ha leun a larguentez,
 O deus roet daou c'hant mil franc vit sicour an dud qèz.

Ar gouarnamant en deus roet pemp million
 Ar ministr anter cant mil franc ivez a doneson,
 Vit sicour ar victimou demeus ar maleuriou :
 Graç deo da receo souden nombr eus a faveuriou.

Autrou arc'hescop Lyon, carguet a vadelez,
 A receo ar victimou ebars en e bales,
 Ha gant teneridiguez e servich boued dezo :
 Ne refus nep maleurus en em bresant eno.

Ur person zo bet guelet gant ur vagad bara
 O vont da zistribui gant ur soign ar vrasa ;
 Güelet e zeus bet ive mestr scol, ar breur Cephas,
 Oc'h ober actionou demeus a gourach vras.

Da ouспен tri-uguent den en deus bet savetet
 O buez goal exposet, prest da veza beuzet.
 Nos-deiz e zê a bep tu, hac en devez guelet
 Un uguent ty o cueza prest ma yoa sortiet.

Ur bêleg qez o vonet gant un enferramant .
 Gant an dour a zo stlapet d'an douar en instant.
 Ar c'horf maro a ruille gant an dour furorus,
 Mes trapet e zeo prim gant ar bêleg courajus.

Autrou Arc'hescop Avignon gant ur vag ya ractal,
 Ha gantàn er memes bag tri viqel general :
 Ar pêvar bêleg Doue a voa guisqet en caoun,
 Evit sicour an dud prest da vervel gant an naoun.

E Seminer Avignon e zeus bet recevet
 Tremen pêvar-c'hant christen privet demeus a voued.
 An doureyer a save betec an tabernacl :
 Ma n'oet qet eno heuzet, certen eo ur miracl.

Güelet è zeus en eur guær ur person vertuzus,
 Glac'haret oll e galon var an dud maleürus,
 O pignat er garidou eus a dour an ilis,
 E zaoulagad en daëlou, en ur glac'har esqis.

En e zaouarn e talc'he ar Sacramant Santel,
 Hac er save d'implori an Doue eternal,
 O rêi ar venediction d'an dud a voa pignet
 Var dôennou an tyer, vit beza savetet.

Soudarded e faction a zo bet discaret
 Gant an dour; eürus int bet da veza n'em dalc'het.
 Redec a rejont d'un ty hac e crimpjont soudan
 Vit en em savetai var lein eus an dôen.

An officer glac'haret rac aon da zont d'o c'holl,
 A laqa clasq ar baguer neuze buan dre oll.
 Eur goberer courajus a yas prim d'o c'herc'het ;
 Ha receo ur recompanç en deveus refuset.

Goulennet en deus hepquen eno an den vaillant
 Un dra vit ellout eva ur banne güin-ardant
 Dre ma voa goal fatic bras : Ar general Aymard
 A c'houlen ur recompanç d'an haros mestr gobard.

Vardro pemp-cant million e zeo bet estimet
 An dommach o deveus grêt ar maleuriou digüet.
 Rac-se eta, Christenien, hastomp prest da sicour
 Dre hor generosite victimou eus an dour.

En oll guæriou deus a Franc hac ermèz anezi
 E teu an oll galonou prest d'en em ampressi
 Gant lealdet ar vrassa hac eus a greiz calou
 Da zicour oll victimou an inondation.

An Esqibien o deveus ive scifet ractal
 D'ar bersonet vit ober en ilisou qestal
 E faveur ar victimou o deveus bet collet,
 Hac a zo en ezom bras hac eus a oll privet.

Nan, na vezimp qet bouzar da vonez hor pastoret,
 Na da hirvoudou an dud zo maleurus rentet:
 Er moment-mâ dreist peb-tra a galamite vras,
 Bezomp-ni oll generus vel ma voemp a viscoas.

Hastomp, hastomp, Christenien, da rêi hon offrançou,
 Rac bras eo an ezomou, bras eo ar maleuriou.
 Ni, dreist oll, Breizis Christenien, bezomp oll generus,
 Ha sicouromp hon nessa en Hano Sacr Jesus.

Christenien ha Francisien eveldomp int ive;
 Rac se en em ampressomp da rei sicour deze.
 Greomp d'hon nessa ar pez a garfemp e vez demp
 Grêt, ma teufe o maleur da criuout ganemp.

Er baressiou var ar meaz e tlese peb Christen,
 Pa deufe da asista da Sul d'an oferen,
 Digas un arc'hant benac evit rêi d'ar person,
 Evit sicour victimou an inondation.

Neo qet e van e vo grêt appel d'ar Vretonet;
 Pa zeo ret ober ar vad e zint hastus bepret.
 Ma vo lavaret e zeus e Breiz-Izel ecleo
 P'eo ret sicour ar maleur, peb Breton mad a gleo,

Er vrô guer demeus a Vreiz e vez güelet bemdez
 A herz e habitantet nombr eus a larguentez :
 Calz o deus roet sicour vit an dud maleürus ,
 Calz vo c'hoas hac a royo , balamour da Jesus.

FIN.

AN TEMPEST

E MONTROULEZ HA VARDRO,

DEIZ GOUËL AR CHANDELOUR 1835.

Var ar memes ton.

O Doue oll-galloudus ! Mestr an elemantchou ,
 Cetu ni ta c'hoas hirio preiz eus an tourmantchou !
 A hoan e zeus pévar bloas , dre ur voceu eüzus (*),
 E voamp-ni oll reduiset da ur stat horrerus.

Rën a ra var hor brô guer un tempest goal gounnar ,
 Hac a laqa da fremi ar môr hac an douar.....
 Petra e zeo an drous-mâ a vranl ar forestou ,
 A stracl bars er meneziou , a scrich en draonniennou ?

Perac-ta an drous hir-se , ar yuderez hep fin
 Diouz an oll elemantchou , diouz an nos d'ar mintin ?
 An horruplou avel bis , stringet dreist hor pennou ,
 Dindan un ênv teval dû a lanç e dempestou.

Yudal , trei ha gourdrousi a ra gant trous eüzus
 Hac e teu da venaci dreist oll Breiz maleürus !

(*) Ar C'holera-Morbus e 1832.



Oll goaguennou ar môr don savet vel menezion,
Hac en o flonjont qerqent e fonç an abimou....

Ar goez bars er c'hoajeyer, fraillet ha difframmet,
Hac ar ravajou dre oll a ra en em velet;
Ar grizill, ur môr a c'hlaog a güez vel un diluch,
Hac a laqa en dro deomp qement zo en distruch.

Ar voasiouigou a zo en goasiou bras chenchet,
Hac an oll rivierou zo tro var dro debordet.
Lodennou bras menezion zo en em distaguet,
Pontchou a zo distrujet, ha tyes discaret.

An oll restajou a heuil fulor an doureyer;
Hac anfin nemet horror dre oll mui na veler,
Ar glao, grizill hac avel en ur seurt tintamar,
A laqa crena betec en caloun an douar.

Var ar môriou al lestri tolet ha distolet,
A string prest var ar riblou corfou martolodet,
Ar bed a zo menacet da zistrêi d'ar c'haos,
Hac a seblant da vesqa hac an deiz hac an nôs.

Peur e velimp-ni ar c'halm en hor brô qer o rên,
Hac ar boneur o tonet etouez ar Gristenien!
Doue a visericord, ho pet ouzomp truez,
Ha laqit an union hac ar peoc'h en hon touez.

O tempest qer spouronus! arrêtit ho furo!...
O va brô guêr! ô natur! ô theatr a horroll...
O va Doue! chadennit an tourmantchou dirol,
Hac accordit, ni ho ped, ar c'halm bremâ demp oll.

FIN.

E Montroulez, e ty LÉDAN, e traon ru ar Vur.